

# Cantique à Saint-Guénolé

## Refrain :

O Saint Patron, ô notre Père,  
Saint Guénolé, du haut du Ciel,  
Daigne écouter notre prière  
Et porte-la vers l'Éternel.

1

Aimable saint, dès la plus tendre enfance  
Tu fus docile à la voix du Seigneur,  
Tu conservas le lis de l'innocence,  
Immaculé, dans toute sa fraîcheur.

2

De nos enfants ineffable modèle,  
Obtiens de Dieu, par ton puissant secours,  
Qu'à leur Baptême, ils demeurent fidèles,  
Chrétiens vaillants jusqu'à leur dernier jour.

3

Toujours affable, et pour toi seul austère,  
En ton couvent pratiquant la vertu,  
Dans le cœur, l'étoile de la prière  
Tu remportas la palme des élus.

4

Enseigne-nous de la vertu les charmes,  
Fais-nous sentir du péché la laideur ;  
Si nous péchons, fais que le don des larmes  
Nous mette alors le repentir au cœur.

5

Sur nos marins qui parcourent le monde  
Veille toujours, guide-les sur les flots,  
Car en écueils, la mer est si féconde !  
Sors le salut, l'Espoir des matelots !

6

Pour honorer et baisser tes reliques,  
Ton peuple en foule accourt de toutes parts ;  
Oh ! garde-lui la foi, les mœurs antiques,  
Trésor sacré de tes fils Léonards.

A. C.

## IMPRIMATUR :

Quimper, le 9 mai 1921.

A. COGNEAU, V. G.

# Da Zant Gwenole

Meuleudi ha Peden

VAR DON : Kantik Lambader.

## DISKAN

Kanomp, kanomp a greiz Kalon  
Henor ha gloâr d'hor Zant Patron  
Ha goulennomp, dre hor peden, } bis  
Euz he vennoz an aluzen.

1

Pa zigor ar pemped kantved,  
Tost da Zant-Brieck eo ganet  
An Abat santel Gwenole,  
Hor Patron mad dirag Doue.

2

Fragan ha Gwen eo he gerent,  
Deut a Vro-Zaoz, da heul ar Zent,  
Da jom, gant eur rum Bretouned,  
E Ploufragan, var ribl ar Gouët.

3

Daou zen leun a zoujans Done,  
Avak m'eo ganet Gwenole,  
O deuz touet hen rei dezha,  
D'he garet ha d'he zervicha.

4

Ar c'hrouadur, yaouankik c'hoas,  
Leun a furnez ha leun a c'hras,  
A c'houlen beza beleget :  
He dud, siouaz, n'hen lezont ket.

5


Eun deiz an tad, n'he zonarou,  
A zellé var he labourou ;  
Setu ar gurun o krozal,  
Ha Fragan diskaret rakta.

6

He zervicherien diredet  
A dreuz he glemmou 'deuz klevet :  
« Ho polontez, o va tioue !  
Kemerit va mab Gwenole. »

7

Pelloc'h ne jom mui d'argila,  
E kenver enezan Brehat,  
E kouent enezan Laore  
E zaio d'ar skol Gwenole.



8

Ouz sant Budok eno sentuz  
 E tesk, e doare burzuduz,  
 Ar Skritur Sakr, ar gwir lezen,  
 Ar zantelez, ar binijen.

9

Doue da zant Budok neuze  
 A lavar : « Lezit Gwenole  
 Da vont a dreiz an douarou  
 Da skigna sked he vertuzion. »

10

Gant unnek euz he ziskibien  
 Gwenole'gerz raktal en hent,  
 Dre Landreger ha Kerhaëz,  
 Etrezek ar mor a-nevez.

11

Dirag ar Faou, e kreiz ar ster,  
 E zeuz eun enezen dister :  
 Eno gant he oll vignoned  
 An den santel zo diskennet.

12

Euezennik, te zo sakret  
 Gant peden ar vñee'h brudet :  
 Te vo hanvet iviziken  
 « Tibedi » gant ar gristenien.

13

Sant Gwenole, goude tri bloaz,  
 A zistro var an douar braz :  
 Var ribl ar mor n'eur e'horn distro,  
 E Landevennek, e chomo.

14

Doue ro dourn d'he zervicher :  
 Ar Roue Grallon, a Gemper,  
 O klevet brud he vertuziou,  
 A ginnik dezha douarou.

15

Setu eur gouent o sevel,  
 A rai honor hon Breiz-Izel.  
 Ennha Gwenolé, beleget,  
 A ren buez santel meurbet.

16

Buez a boan, a binijen,  
 Buez a labour, a beden :  
 E kreiz ar brassa trubuilhou  
 Ar mouze'hoarz var he vuzellou.

17

Ha pa zeu Doue d'he c'halver  
 Me vel ar zant ouz an Aoter :  
 Harpet var daou 'z he ziskibien  
 D'ar baradoz e sav laouen.

18

Patron karet Locquenole  
 Diouallit mad ho pugale ;  
 Var an douar ha var ar mor,  
 E tale'hint d'ober deoc'h henor !

19

En hor parrez, ho relegou  
 Zo bet miret gant hon tadou :  
 Errhez dispar hon esperans,  
 Dezhio ni ginnik hon doujans.

20

Oh ! grit ma chomo doun ar Feiz  
 E kalonou Locquenoliz,  
 Evel griziou ar gwez dero  
 E kreiz kalon douar hon bro.

21

D'ar yaouankis roit furnez,  
 D'ar vugale sentidigez,  
 Ha d'ar gozni kalon nerzus  
 Da zivoaska buez poanius.

22

Gant alc'houez aour ho pedennou  
 Digorit deomp dor an envou :  
 Ha ni gano deoc'h mil bennoz  
 E kreiz dudi ar baradoz.

A. C.

IMPRIMATUR :

Kemper, 10 eiz meurs 1921,

A. COGNEAU, V. G.

